



DEVEZH STUDI

Kamp Etrekeltiek Ar
Vrezhonegerion a ginnig deoc'h
un devezh-studi :



Gant Lukian Kergoat

Ar SDEG, sindrom dic'hallusted
d'en em gompren, (C'est pas/plus
le même breton!)



Gant Mélanie Jouiteau

Peseurt binviji niverel evit studiañ
ha diorren implij ar brezhoneg



ER GREIZENN
AMZER-NEVEZ
56270 PLAÑVOUR

LAKAIT HOC'H ANV

SADORN 8
A VIZ C'HWEVRER
2025



www.keav.bzh



02 98 95 59 31

ROLL AN DEVEZH




9e30 - Degemer ha banne kafe
10e00 - gant Lukian Kergoat


LUKIAN KERGOAT

AR SDEG, SINDROM DIC'HALLUSTED D'EN EM GOMPREN, (C'EST PAS/PLUS LE MÊME BRETON!)


Raktres labour



Norm ha variañs a vez kavet e kement yezh a zo.



A bep seurt reizhennoù da skrivañ brezhoneg a zo bet a-hed an istor. Test int da emdroadur ar yezh. Dalc'hmat ez eus bet un doare “panlekt” skrivet, unvan a-walc'h evit an eskemmoù dre skrid.



Variadurezh a vez kavet a-hend-all. Komzet e vez deus rannyezhoù, deus “dialektoù” hag a bep seurt “lektoù” all. A holl viskoazh ez eus bet gouezet ober gant an disheñvelderioù-mañ. Nemet bremañ e vez roet pouez d'ar c'hemm, betek embann n'eus ket a gengomprenidigezh ken. « C'est pas le même breton ! » a vez klevet ingal. E-giz pa vije taget ar vrezhonegerien gant ur “Sindrom Dic'hallusted d'en Em Gompren”, ar SDEG.

Lukian Kergoat a zo bet o kelenn e skol-veur Roazhon 2, er gevrenn Brezhoneg ha keltieg m'eo bet en he fenn ur mare a zo bet.

En diavaez d'ar skol-veur en deus kemeret perzh e krouidigezh eil derez Diwan.

E penn Kreizenn ar Geriaouiñ emañ atav, ar greizenn a derminologiezh bet savet da harpañ ar raktres: brezhoneg21.com. Diwar ar Greizenn ensklask war an anvioù-lec'h, bet savet gantañ er bloavezhioù 80 eo ganet Ofis ar Brezhoneg.

TUD NAMMET




02 98 95 59 31


Mont e darempred
ganimp evit studial ho
koulenn hag an
ezhommoù kempouezañ




PESEURT BINVIJI NIVEREL EVIT STUDIAÑ
HA DIORREN IMPLIJ AR BREZHONEG

Raktres labour

 Diskouez a raio deomp mont endro al lec'hienn a vez bremañ gweladennet bemdez gant kant den pe muioc'h, er bed a-bezh.

 Displegañ a raio peseurt skoazell a c'heller tennañ evit ar yezh eus ar wikiyezhadur evit sevel binviji treiñ a galite.

 Digeriñ a raio ar gaoz war an naouegezh artifisiel, an dañjerioù hag ar skoazelloù a c'hellomp gortoz e kalon an dispac'h teknologel a-vremañ.

Mélanie Jouiteau a zo enklaskerez er CNRS. Arbennigourez eo war ar yezhoniezh ha rannyezhoù ar brezhoneg, ha pelloc'h war ar binviji niverel war sevel evit ar yezhoù minorelaet dre vras.

E-touez he labourioù pennañ emañ al lec'hienn ARBRES, a zeskriv yezhadur ar brezhoneg hag he rannyezhoù evit ar yezhourien hag ivez evit an dud o teskiñ ar yezh pe o klask kompren he mont endro.

STUMMADUR
DIBAOUENZ


Ar stajidi a c'hall goulenn ma vo paeet o staj dezhe gant stummadur dibaouez o embregerezh. Savet e vo un emglev etre o embregerezh ha KEAV. A-raok kas o fichenn-enskrivañ e rank ar stajidi mont e darempred gant ar c'henurzhierzh (kenurzh@keav.bzh).



4e00 - Bilañs an devezh-studi.
4e30 - BODADEG VEUR KEAV



DEVEZH FICHENN STUDI ENSKRIVAÑ



D'ar Sadorn 8 a viz C'hwevrer 2025

☒ Anv

☒ Anv bihan.....

☒ Chomlec'h

.....

☒ Pgz

☒ E-meil

☒ Da gas da: KEAV
22 hent Moulouen, 29000 KEMPER
keav@keav.bzh

☐ Vejetarian on

☐ Dont a ran dre ar stummadur
dibaouez

IBAN : FR76 1558 9297 5400 9947 27 94 476

PRIZ AN DEVEZH

38€ - mizoù pedagogel ha
pred

33€ - evit ar studieren ha
tud o klask labour

+ 5€ skodenn vloaziek

D'ho kelaouiñ: Skol-Hañv 2025

Div sizhunvezh-studi a vo kinniget ar
bloaz-mañ c'hoazh :

☒ Ar prantad 1añ :
eus ar **Sul 6/07** da noz
d'ar **Sadorn 12/07** da greisteiz

☒ An eil prantad :
eus ar **Sul 13/07** da noz
d'ar **Sadorn 19/07** da greisteiz

Bez e c'hellit dibab chom ur sizhunvezh hepken, pe chom an div